



SANTEZ BRIJIDA



BUEZ HA CANTIK

SANTEZ BRIJIDA

Péhini é deuz eunn Iliz dévod én Parouz
Lanvilin.

War don : *Elez euz ar Baradoz, Ar Paour kez Reuzeudic, pe
Brewiez ar Feiz.*

Spéred-Santel, mé ho péd, sélaoued ar bédén
A ra d'hec'h ann disterra euz ho servijerien;
Karged a zempladurez, a bép tra ézommek,
D'hec'h ma dorn a astennan 'vel d'eunn tâd karantek.

Diskan hag en euz lec'h warlerc'h bép koupled :

Ni ho péd, ô Brijida, zantez kén gloriuz,
Gréd euz ann Env war Vreiziz eur zéll trugarezuz;
Ha c'houi, Breiziz éwit-hi, béd holl anoudegez,
Ha da béb maré 'wid-hoc'h 'vo eur wir batronez.

Sklerijenned ma spéred ma c'hallin diskleria,
En berr-gomzio, da Vreiziz bué ger Brijida;
Ar vué-zé kén skoériuz, 'wid ann holl a dra zur,
'Zo 'vel d'eul léstr war ar môr hé goélio hag hé stur.

Euz rouané ar Sued é tiskea Brijida;
Hé zâd 'zo hanwed Birjer hag hé mamm Sigrida;
Daou zén a oad ann noblanz, a oad ar rouané,
Hag enn ho c'halon doujanz ha karanté Doué.

Eunn dé war vôr ar Sued eunn tempest kounnaruz
A stlab, a zistlab eul léstr enn eunn doaré euzuz;
War al léstr-zé Sigrida ha tud all enn anken,
Prést étré ar môr hag hi n'ho deuz kéd eur planken.

Neuzé tré hé daou gosté Sigrida a zougé
Ar bugelik Brijida, dibabet gand Doué
Da labouret 'wid hé c'hloar, silwidigez ann dud;
'Wid harz na vijé kollet Doué 'ra eur burzud.

Enn nôz war-lerc'h Sigrida a wélaz diraz-hi
Eunn dén kôz hag a gomzaz enn doaré-man out-hi :
« Dré c'hras Doué ho pué a zo gan-hec'h lezet,
« Lezed eo abalamour d'ar vérc'hig a zougéd.

« Ewid karanté Doué béwed ho puél kér,
« Disked, kared anézhi gand eur galon déner,
« Evel eur prézant dispar 'zeu d'hec'h euz ann Envo
« Hag a zougo liez vro moéz Jézuz, hon Otro. »

Pa zeuaz war ann douar ar bugel-zé a c'hrâz,
Eur belek santel meurbéd, aboé eunn éskob brâz,
Pa oa ô pédi Doué a spéred, a galon,
'Wél eur goumoullen skéduz 'rok fin hé orezon.

Er goumoullen-zé 'wélaz azéed eur werc'hez
Hag a gomz d'éhan 'vélen euz ar grouadurez :
« Da Virjer é zo ganed eur vérc'h hag a vézo
« Hé moéz gand éston, klewet dré bewar c'horn ar vro. »

Kouskoudé émpâd tri bla é chomaz ar zantez
Héb galloud lared eur gomz, hénvel euz eur vudez;
Mez, dré vurzud gand Doué, ével d'ar broféted,
Adalek neuzé ar gomz d'ézhi a zo roet.

Bugelik iaouank meurbéd, bugél hép kén dré oad,
Brijida da goll hé mamm é deuz ar galonad;
Neuzé én tî hé moéreb gand hé zâd eo laket :
Hé moéreb 'wid eur vamm vâd d'ézhi 'zo zervijet.

War dro ann oad a zeiz vla ar bugel evuruz
'Wél enn hé c'hambr eunn oter ha war-n-hi Mamm Jézuz,
Gwisked a zilliad skéduz, eur gurunen gant-hi;
Da zond d'hé c'hémer é péd Brijida gand dudi.

Brijida d'hé digémer, kénkent gand lévénéz,
A zav, a ia primm dirak Rouanez ann élez :
O pébez joa éwid-oud, bugel meurbéd karet !
Da éternité euruz dija 'c'h euz tanwéet.

Adaleg ann amzer-zé, dija meurbéd santel,
A spéred hag a galon gwerc'h kunével eunn el,
Enn hend ann holl vertuio é kerz héb héani :
Hé finijenno kalet 'ia bemdé war gréski.

Klewed a ra da zék vla prézeg ar Basion ;
Holl gomzio ar prézéger 'gwé don enn hé c'halon ;
Ac'hané bétég hé bé bemdé é skuill dero
War ar poanio gonzanwet gand Jézuz, hon Otro.

Enn nôz war-lerc'h diraz-hi, Jézuz kén dous, kén mād,
Goloed a c'houllo, a gracha hag a oad,
A zo en em ziskouezet, 'vel pa oa war ar groaz,
En eur lavaret d'ézhi : « Ma mérc'h, séll ouz-in c'hoaz.

« Séll én pé stād truezuz, séll pénoz on laket :
« Ma holl izili brewet, ma c'horf holl dispennet.
« — O ma Doué, ém' ézhi, pé zén ken dinatur
« 'Zo enn ho kéver kiriek d'eunn torfed héb muzur ?

« — Ar ré, émé Vâb Doué, 'dor ma gourc'héménno,
« A zispriz ma c'haranté, a vlasfem ma hano. »
Ha goudé zé Brijida a wélé hé c'halon
'Vel ma teué 'nn hé spéred mister ar Basion.

Ar béden, ann orezon, hag ann obéro-mād,
Hé labour 'wid ann Iliz, hé déverio a stād,
D'he holl en em ro bemdé, 'vel eur grouadurez
Hag a ra euz komz Doué héc'h holl magadurez.

Ewid senti euz hé zâd, d'ann oad a drizek vla
Démézi 'ra da Ulfon, prinz a Nérésia.

Leun a fé digand Doué é c'houlenn eur mennad ;
Ar mennad 'dlé da c'houlenn ann holl briéjo mād :

« Mar d-on gan-hec'h, em' ezhi, da véa mamm galwet,
« C'houi, ma Doué, em c'halon a anav eur réked :
« Ra n'am bézo bugalé némed éwid ho kloar ;
« Dreist pép tra gwir gristenien, skoér vâd war ann douar. »

Dirak daou lagad ar fé eur bédén kén meuluz
'Ia, 'vel ézanz a c'hoéz vâd, bété kalon Jézuz :
Unan euz hé eiz bugel, holl bugalé a c'hraz,
Katerin ar Sued 'zo diskleriet santez vrâz.

Dré héc'h alio Ulfon, hé fried mât meurbéd,
'Wid heuill welloc'h ar vertu, a guita krenn ar béd ;
Mond 'ra da rilijiuz ; ha goudé hé varo,
Enn hé urz eo gand ann holl énoled hé hano.

Ewid kréski mui-oc'h-mui én gras dirak Doué
E krésk hé fiuijenno bété fin hé bué :
Ann diénez a bép tra, hag ann holl boanio kri,
'Vel joaio ar ré vrasa 'zo kéméret gant-hi.

War hé c'horf, 'wid énoré Pasion hon Zalwer,
E ra gand golo alum eur gouli béb gwéner.
Es kalon, ô Brijida, 'teo tan ar garanté ;
Huel meurbéd enn Envo 'vi renket gand Doué.

Liez a wééh Brijida gand ann Env 'zo galwet
Da gentellia rouané, éskibien ha pabed ;
Béd é deuz enn hé bué révélasiono,
'Rog ha goudé hé maro gret kalz a vurzudo.

En Lanvilin a Dréger, éwid ho dilivranz,
Ar mammo poanied hé féd gand eur wir gonfianz.
Holl, péb unan enn hé stâd, béomp dévosion
D'eur zantez kén gallouduz dré hé froteksion.

J. HINGANT,

Kuré Hengoat.

ORÉZON.

Tad Eternel, c'hui pehini, dre meritou hon Salver Jesus-Christ, en deuz revelet da zantez Brijida ar secrejou demeurez an Envou, gret deomp ar c'hras, dre intercession ar zantez-mâ, da bossedi assembles ganti ar memès gloar hag eurusdet evelti epad an eternite. Amen.

Approuvet gant an otro A. CHATTON,
vikel general.